

Ha goude m'hon d'o tremenet  
An draonien-ma a zaelou  
Deuit primm d'hon digemeret  
En ho kichen en Envou.

Eno epad an holl amzer,  
Unanet gant Hon Doue,  
Hon levezez vo Mamm dener,  
Diskuez d'oc'h hor c'harante.

Y. LAVIEC.

IMPRIMATUR :

*Corisopiti,*

*die 14 Novembre 1908.*

A. COGNEAU.

VIC. GEN.

KANTIC

# ITRON VARIA BENODET



WAR DON : *Itron Varia ar Porzou.*

Itron Varia Benodet,  
Sellit ouz ho pugale ;  
A beb tu omp deut d'ho kuelel :  
Mamm !... En han' Doue true !

Vit diskuez d'oc'h ho c'harante,  
Hon tud koz Guerc'hez santel,  
Roaz ama d'oc'h a leve,  
Kaera korn euz Breiz-Izel.

Eun dudi ez eo da velet,  
Hoc'h iliz, Mamm dous ha mad,  
Demdostic d'ar mor fuloret,  
En dro dei mantel ar c'hoad.

E c'harz he zreid eo dirollet  
Ar ster 'vel eur zeizen vras ;  
Gant an tarzou steredennet,  
Koulz hag en noz ann oabl glaz.

Ennhi n'ho peuz ket ehanet,  
Hed korden ar c'hantvejou,  
Da rei sikour d'an den poaniet,  
Da zelaou he hirvoudou.

Morse ne c'helfet niveri  
An dud paour bet pareet  
Euz an enkreuz, Guerc'hez Vari,  
An droug penn, ar boan spered.

Evelse beb bla ve gullet,  
Da zul kenta Guengolo ;  
A bep koste pelerinet  
O tiredet tro var dro.

Ar skeudennou koar digasset  
Ama gant ar glanvourien,  
A ziskuez eo bet selaouet,  
Gant madelez ho feden.

Hirio ive Mamm benniget,  
Ni a bromet d'oc'h d'hen tro,  
Ne vezo morse dilezet  
Hoc'h ilizou en hor bro.

En desped d'an dud disakred,  
Ato 'nijo ho paniel,  
Digailhar, karet, henoret,  
A uz douar Breiz-Izel.

Ar c'hrogad vo stard martreze,  
An dud fall zo kounaret !  
Mez skoazellet gant Mamm Doue,  
Biken ne vezimp trec'het !